

Ar chanson nevez savet gant eur den youank

Evit ober honor d'e vestress koant

1

O Doue trugarezus augmente ma speret
Ma compozin a chanson da ma mui karet
Da ober honor dezi de meus he hoant gwirion
Da brezeg en e frezans gant komzouaffeson.

2

Car me zo eun den yaouank ho tremen ma amzer
Ho poursu ma avantur partout dre ha hater
Mag he meus dre esperans kavet evit mestress
An agreapla plarc'h youank e oa barz ma farrez.

3

Hi eo ar gaero rozen deus ar merc'het youank
Na netra na vank d'ezi na guene na talent
Nag ive sentiment vad na gwir gontant a man
Na dousder na donezan nag amitié fervant.

4

Ma mestress zo bullantoc'h eget ar fourdilis
Kaeroc'h e zeo formet eget an holl berliz
He diou chod zo guen ho ru he daou lagad joaius
He daouarn evel anerc'h he mouës melodius.

5

Abaoue pel zo amzer me he anaveas
Me sonje he oan indign da antre en he gras
Abalamour d'he furnez oa dreist an holl verc'het
Ne hellan ket fredri he oant predestinet.

6

Setu men n'em lakat prezans ha femalen
He neur laret d'ezi an gonz ma evel lenn.
Veniet secure me filia juvenda
Me garfe ven do tezir evel ma gleont beza.

7

A hi ober a jilaou gant eur galon laouen.
Gant an er ken grazius hi komzas evel len
No me heulliot credit sur den yaouank
Da lerc'h peus destin ne vezo ket ha vank.

8

Setu men o sortial joaius bras ma speret
No antreal barz an plaz mo d'ezi indufret
Sevel rean ma daou droat da bigna bars ar gramp
Hag heb dale gavall bel ma mestress oa present.

9

He fedit am eus da zont azesa em c'hichen.
Bremen rekont goulou c'hoas sikour ha sklerijenn
Gant doust er ha joaiustet, contantaman locans
Da saludi ma dousic koant gand peb sort reverans.

15

Ma speret a bep moment a repren ma c'houstians
Pa ra mal dinda r'houd pennoz vo ma zetans
Rak-se n'im lakean d'ober ar balead
Da antren he ti ma mestress vit kavout gras de zad

16

Ho g'uelet rangant joa ti ma muia karet
Drida ra ma c'halon laouen he ma speret
Ma halfen eureuzi gati war an douar
Ni avezo daou zen eurus evel eles ar gloar.

17

Bonjour deoc'h compaignoness deus agreis ma c'halon
Hebdale gwal bel me ra va c'homission
Car me zo deuet da c'houlenn diganeoc'h ar requet
Ma plich gant ho madelez da raïd'in an olijet

18

Etre o merc'h ha me zo eur chaden formet
Gant prinsess a yaouankiss rouaness ar gaera
Ha kement-se he oblij da zonet da c'houlenn
Diganeoc'h ho merc'h an dra gaeron serten.

19

Car ni zo deuet da nim choaz dre garante flam
Evel ma reas gwechall gora hag Abraham
Hag evit o well fa skler merg eus hon amitié
Setu hi so prezant goulennit digati.

20

Lavaret d'in ma merc'h ha c'hui a zo contant
Da zon da zimisi gant den yaouank-man
Ho ya va zad me zo kontant meurbed
Ra n'im choaset hon an daou de garante parfait.

21

Diavanset den yaouank deut tre da azeza
Dre ho komzou agreabl ne refuson netra
Ha pazoc'h n'im choaset dre bolante Doue
Ve pec'het ho separi an eil eus egile

22

Me ra va c'honsantaman doc'h c'hui otaou
Da zont da n'im guemer evit beza priejou
Ha c'hoaz e teziran chans ha douetans vad
Ken ma pado ho tevezioù atao da joughissa.

23

Setu ni zo dimezet hag eureused ive

9
He fedit am eus da zont azesa em c'hichen.
Breman rekont goulen c'hoas sikour ha sklerijenn
Gant doust er ha joaiustet, contantaman locans
Da saludi ma dousic koant gand peb sort reverans.

10

Ma gwir vignoness fidel me ren deoc'h ha salud
Pas zon n'im dennet hon duoua deus dirak fas andud
Da ober eur c'homplezans oa ma bresa c'hoanj
Da gleveto toare hervez ma santiman.

11

Ma neo ket evit ma zrompla oc'h an denn curius
Me parlanto ganeoc'h dregornz karantezus
Mez ken evit konta deoc'h doare va santiman
Ma ho ped da veza ferm en ho komzou den yaouank.

12

Car me lar deoc'h ma servicher ha ma braza mignon
Ravisset he ma speret, gonezet ma c'halon
Mes me o suppli da zont da c'houlen constantaman
Na nivo dimezet gant diou galon gontant.

13

Ho rozen an amitié fleuren an holl merc'het
Ar zonch-se oa pelzo o ren ba ma speret
Da glevet ar gomz-se oa ma brasa c'hoant
Breman pa peus he laret setu me zo kontant.

14

Gant kalz a blijadur ma dous ma horante
Me zeuo do koulen ne vo ket pel dale
Mez graet ho supplication evit me vokat loret
Na pleget mail deus ar chaden var pez ha peus laret.

Da zont da n'im guemer evit beza priedou
Ha c'hoaz e teziran chans ha douetans vad
Ken ma pado ho tezeziou atao da joughissa.

23

Setu ni zo dimezet hag eureused ive
Mes darc'homp ato ferm an eil egile
Breman ma mije diou askel me nichfen d'an nemo
Hagasfen ma mestress ganin betek eno.

24

Da houlen digant Doue roue ha gwir huel
Pennoz e hellin goni he c'hoor selestrel
Mez pa non ket evit mondi me bed c'hoaz va Doue
Da ziskouez d'in an hent var an Dranhouenn-me

25

Ma mab eme scritur lennet leor ar furnez
Eno ma ar vertus an tenzor ar vuhez
Evit kemen he heullio a neus assurans
Hag a vo kurunnet ebarz e eurstret evit e recompans.

26

A c'houi va c'hompagneuness ma plich ma excusei
Ma m'eus komzet re fragil he dre ma ouan ket
Rak me zo den yaouank hag non ket bet scoliet
Car ma moyen oa re sister evit prena speret.

27

Evit kemen a gana ar zon-ma ben a ben
Gras deon da bosedo ar c'haera kurunen
Hac'hoaz teziron da tout re zo chilaou
Ar bonheur da jouissa eus ho c'hloar an envou.